

- 88 -

evit tanet ne vesfont ket
 a-walc'h eo d'he beza laeret.
 Eunn den chentil voa er c'hountre
 eunn den nobl a galite
 a oa en de warlerc'h mintin mad
 evit mont da chascal er c'hoad.
 Ebarz er c'hoad pa eo antreet
 tal ar vereuri pe'n em gavet,
 meurbed en em gav souezet
 'welet digor ann orojoñ
 ha n'oa kristen tro-war-dro.
 Ebarz enn ti p'eo antreet
 da c'houeza tan en em lakeet,
 da c'houeza tan, d'allumi goulo
 da c'hout petra a oa eno.
 Ar goulou pen deuz allumet
 daou zenik koz en deuz kavet :
 - Daou zenik koz d'in-me leveret
 petra ganehoc'h zo errued.
 - Traou 'walc'h ganemp zo erruet :
 al laeroun warnomp a zo bet.
 - Daou zenik koz, d'in me leveret
 ha c'houi anveit hini an-he
 - Me ne anveann hini an-he
 nemet al laer Gion Gere
 hag he gamarad Fanch ar C'halve.
 'n aotrou Gerlavar pen deuz klevet
 da skriva ec'h en em lekeet,
 da skriva ec'h en em lekeet
 d'ober d'an archerien em gavet.
 - 'n aotrou Gerlavar a vonjoure
 e Bourg Plunek pa ziskenne :
 - hostizez, din-me leveret,
 eunn noz ha ni a ve lojet ?
 - Komodite vraz a zo em zi
 evit eunn nozvez d'ho repui.
 Logerien hirio n'em euz ket me
 nemed al laer Gion Gere.

 nemed al laer Gion Gere
 he gamarad Fanch ar C'halve.
 'n aotrou Gerlavar vel m'en deuz klevet
 he zourn d'he c'hodel en deuz riklet.
 - Dalet, hostizez, eur pez daou skoed
 marde 'r wirionez a leret.
 Marde ar wirionez a leret
 hag /ar voien/° d'en kemeret.
 P'ho devez debret mad ho fred
 hag ingaveuret ho c'hezec,

° a-us: an tu vad

- 90 -

pa oann enn oad a zaouzek vloaz
 e fellaz d'am zad va c'horrija.
 Va zad a choum war he wele klan
 me c'houezaz ann tan warnezhan,
 me c'houezaz ann tan e ti va zad
 pa ne gare ann ankou he c'hoantaat,
 c'houeza ann tan e plouz e wele
 hag hen devi hen beo buhe.
 Pedit evit han, ma mignouned
 he daolet d'ann traon pa geret.
 Gion Gere a lavare
 e vaz huela 'r skeul he c'houde :
 - Introun Varia a Greiz Ker
 bezit trugarezuz em c'hever.
 Etre Montroulez ha Gwened
 me eureu ma c'henta torfed.
 Me 'zizoloaz triwac'h pignoun
 O va Jezuz, pebez estoun !
 ken a lare tud ar c'hontre :
 - hema zo tan aberz Doue.
 Etre Mountroulez ha Gwened
 Triwac'h grek wragez en doa lazet
 vit goud ann action gant-he
 penaoz e tougent ho bugale.
 - Pedit evithan, va mignouned,
 he daolet d'an traon pa geret.
 Fanch ar C'halve a lavare
 er vaz huela ar skeul he c'houde :
 - Introun Varia a Greizker,
 Bezit trugarezuz em c'hever,
 pa oan er gear e ti va zad
 me eureu d'am mamm tiegez mad.
 Va mamm ha laret d'in eunn de :
 - va map, te zo eur bugel ker
 pa n'hellez kavet eur ciboer;
 eur ciboer a dlefez da gavet
 da lakat aman pa ve sallet.
 Hag hen o vonet da iliz Plougano.
 Pa erruaz noa den war dro.
 Hag hen o vont prountamant,
 digeri arbel ar Zakramant.
 Eur vouez euz ann env en deuz klevet,
 da Fanch Kâlve he deuz laret :
 - Aze, Mignoun, nec'h euz ket great mad
 pa ne da zaouarn daouarn zakr.
 pa zea eur pennad diouz ker
 hag hen o tigeri ar ciboer
 a voa ennan triwac'h hosti

- 91 -

a zebraz holl d'he zijuni.
 Ne glemman den deuz ma c'hontre
 na kennebeut deuz va ligne
 nemed Map ar Briz° deuz °° Plouber °/Mazer/ °° a-us :a
 garfenn 've ama em c'hever.
 Hennez a laras d'in eunn de
 klask dezhan eur bugel divade,
 klask dezhan eur bugel divade
 e teskje dezhan traou°neve ° a-is : ardou
 ha me mont war hent braz Keraez
 a rankontriz eunn dougerez,
 e rankontriz eunn dougere
 o tont deuz ofern ar beure.
 - Dougerez din-me leveret
 pe oad ar bugel a zouget ?
 - e tro eur seiz miz hanter
 ha ne ket achu he amzer.
 hag hen tenna he gountel asten
 ha trouc'ha ar plac'h rez he banden
 ha tenna diout hi eur map,
 eur bugel kaer evit he oad.
 pa erruaz gant han e Plouber
 n'oa ket map ar Briz er ger,
 n'edo ket er ger map ar Briz
 ha teleur anezhan enn eur parkad drez
 Kriz vije 'r galoun a glevje
 biou ar parkad drez nep a dremenje
 o klevet ar bugel o krial hep paoue
 o c'houlenn badiziant d'he ene.
 p'erruaz mab ar Briz er ger
 e oe diframmet ar bugel,
 e oe diframmet ar bugel
 ha desket dezhan traou neve
 da vale hardi enn pep kountre.
 - Pedit evithan, ma mignounet,
 he daolet d'an traon pa geret.

vvvvv